

Al Letrin beo

AVIZ

*Al levrig-ma' so bet skrivet
Evit tud ledan a speret :
Oc'h ar re all e tifennan
Lenn, na silaou lenn anezan.*

Paolik, an diaoul pe Satan
A boaign, a labour, eb ehan,
O klask ober drouk a brezel
D'an traou mad a d'an dud santel.
Pa c'hell trompla an dud devot
E c'hounid essoc'h ar re zot.
Var gement-se, ag evit skuer,
Silaouit eun historig ver.

Guechall e voa en eur barrez
N'oun dare cals e pe gostez,
Credabl e tu menez Aret,
Ar menez-ze kement brudet ;
Lakeomp e Plouneour-Menez
Pe mar cavit guell, er Fouillez
Dre eno var a leverer
E teuz ar Mab prodig d'ar ger.
Gouzout a rit e pe seurt stad
E tistroaz da di e dad :
En eur stad meurbed truezuz,
Drebet e gorfgant an astuz,
Er c'hoz tam tek toull var e benn ;
E dreid diferoù, diarc'henn ;
Eu dro dezan nemet truilhou,
Var e vizaj liou an ankou.
Mes n'eo ket euz ar mab prodig
E z'euz menek en historig :

Distrei a ran dezi gant prez ;
Selaouit mad, taolit evez.

Bez' e voz, eta, eur vaouez
Eur vaouez goz anvet Jeanton,
Brudet estreget er c'hanton
Dreist oll dre an aliou mad
A roe d'an dud a bep oad.
Etal ti an autrou person
En er c'hos tam lochennik plouz,
E veve sioulik a didrouz.

Jeanton voa bet, en e amzer
Ar goanta plac'h eus e c'harter ;
A ma vije bet fortuniet
Pinvidik, morfad, vije bet.
Choazet e deuz stad ar gwerc'hded
'Vit servicha Doue bepred
A labourat liproc'h a ze,
Da zilvidigez e ene.

Abaoue e c'henta iaouankiz
Jeanton a gempen an iliz ;
Eus peb tra er zekreteri
I eo e deus an oll zourci.
Meur a berson, meur a gure
'Zo bet er barrez abaoue.
Beteg teir guech, en e amzer,
E z'eo bet chenchet ar c'hloc'her.
Setu perak brema Jeanton
Var an oll e deuz levezon ;
Ag e daou gonseil ar barrez
E ve silaouet e mouez.
Beteg zoken al lamponet
A zoug dezi doujans, respet.

Och pep-ze, Jeanton a zo paour
Mez bez' e deuz eur galon acour,
Savet e deuz ar paotr Guillou
Ar respunter offerennou ;
Ar paotric keaz var an douar
N'en doa na tad, na mam, na kar.

Character mad, eun tamic skan,
Spered ne vanke ket dezan.
Mez n'oa ket kren var an deski
Re droët voa gant ar c'hoari :
C'hoari galoch, kanetennou
Orel, patati a killou.
Aliez gant e vignoun Saik
Er gwelet o c'hoari riklaik.

Ogen o c'hoari, eun devez
E frotas kement e vragez
Oc'h an douar ag oc'h ar vein
Ma oue per uzet traon e gein ;
Me lavar traon kein e vragou
A voa var nez mont e pillou ;
Guelet a reat, o sellet tost
En doa dija, lizer er post.

Guillou ne reas ket a van
Mez an toull a grescas buhan ;
A ben ar fin tout ar blassen
A zigoraz d'ar sklerijen
Evel ma tigor eur c'hastel
E doriou d'an dud a vrezel,
Pe gentoc'h eur gear gabital
Dismantret gant eur general.

Paolik, credabl en doa ive
Lakeat e bao el labour-ze :
An aneval' so aneza
Ne vank morse pa hell pega.
Anfin e giz ma leverer
Eun dra c'hreat n'eo ket da ober :
Great' voa an taol : bragez Guillou
N'edo mui ken nemet truilhou.
Ag en d'ar gear ar reuzeudik
Mezok evel ar mab prodig.
Setu neuze Jeanton nec'het
Rag paour e voa vel ar razet
A vez, dre an ilizou coz,
O crignat goulou, hed an noz

Ia, Jeanton a voa ankeniet :
Kaer e doa clask ne gave ket
Tam lien, tam mezer ebet.

Sellet a ra oc'h ar lugel :
Gwelet a ra gant an avel
O vont, o vont eun anseign gwenn
Flip-flap en dro d'eb laneden.
Ag e krosmole Jeanton gez.
Assa ! ma ne ket eun druez !
Ret voue da Villou choum en ti
Azezet eb galloud c'hoari !

Egis' meuz clevet lavaret
Eun droug e unan ne deu ket :
Ar pez a greske nec'h Jeanton
Tostaat a rea deiz ar Pardon.
Petra eta, penaos ober ?
Eno ema e oll freder
Ken diez edo e spered
Ma ne zrebaz netra de fred.

Setu Paolik, ret e ma ve,
Ag o tostaat outi neuze.
Ep mar en eo a ziscueza
Da Jeanton eur picol leor braz
Great oll gant crec'bin denved
A voa en eur c'horn astennet

Varnan e velet barennou,
Pikou du a lizerennou.
Siouas ! Jeanton ne vouie ket
Edo leor-cân an ofern bred ;
D'ar mare-ze Jeanton a voa
O ren e fevar ugent vloa :
N'edo ket ker sklear e guelet
Evel m'e voa de zeitecvet.

A setu Satan o c'hoeza
En e skouarn ar c'homzou-mâ :
« Lavar d'in-me piou a vouezo
» Es peo euz eul leor ken teo

la, Jeanton a voa ankeniet :
Kaer e doa clask ne gave ket
Tam lien, tam mezer ebet.

Sellet a ra oc'h ar lugel :
Gwalet a ra gant an avel
O vont, o tont eun anseign gwenn
Flip-flap en dro d'ebaneden.
Ag e krosmole Jeanton gez.
Assa ! ma ne ket eun druez !
Ret voue da Villou choum en ti
Azezet eb galloud c'hoari !

Egis 'meuz clevet lavaret
Eun droug e unan ne deu ket :
Ar pezh a greske nec'h Jeanton
Tostaat a rea dez ar Pardon.
Petra eta, penaos ober ?
Eno ema e oll freder
Ken diez edo e spered
Ma ne zrebaz netra de fred.

Setu Paolik, ret e ma ve,
Ag o tostaat outi neuze.
Ep mar en eo a ziscueza
Da Jeanton eur picol leor braz
Great oll gant crec'bin denved
A voa en eur c'horn astennet

Varnan e velet barennou,
Pikou du a lizerennou.
Siouas ! Jeanton ne vouie ket
Edo leor-cân an offern bred ;
D'ar mare-ze Jeanton a voa
O ren e fevar ugent vloa :
N'edo ket ker sklear e gwalet
Evel m'e voa de zeitecvet.

A setu Satan o c'houeza
En e skouarn ar c'homzou-mâ :
« Lavar d'in-me piou a vouezo
» Es peo euz eul leor ken teo

» Distaget diou pe deir feuillem ?
» Cred ac'hanon ne ouezo den,
» Nann den ne vouezo biskiken ;
» Dal setu aze da aff. r.
» Troch, troch buan a kea d'ar ger. »
Ag en o kass eun dorn Jeanton
Crak var ofis caer ar Pardon.
A Jeanton, touellet siouas !
Peder feuillem hir a droac'has
A ganto, ep scorpul ebet,
Del ma z'eo er ger digonezet
Planeden Guillou zo cuzet.

Ag en oa drôl ar paotr bian
Tacounet, goloet a gan !
Anfin abriet voa atao
Ouz an avel ag ouz ar glao ;
N'euz droug ebet e paourentez
Ag eun dra gaer eo propentez.

Goulscoude deuet an dez caer
Deiz ar Pardon, gouel bras sant Per
Ar mestr caner a glask buan
Ofis ar Patron el leor-cân.
Mez caer en deuz trei a distrei
Ar feuillemou a zeo, a glei,
N'e ket evit caout an ofiz :
« Sur, emeza, eur raz-iliz
» En deuz drebet ofiz ar zant ! »
Ag en nec'het braz : Etroutant
Setu e laosk e zaoulagad
Da goueza var ar c'hamarad,
A gouelet an ofiz a-bez
A digor frank var e vragez.

Neuze 'savaz eun drouz iskiz
Ken a dregernas an iliz
Ag an oll da zabaturi
Dirag eun evelp c'hoari.

D'an Autrou Person voue kasset
An dra evit beza barnet.

An daou gonsel a assambler
Ar mestr-skol ag an Autrou mer
A setu an oll voue aviz
Araok trede son an ofiz,
Sevel Guillou var al letrîn,
A cana neuze oc'h e gein.

Ar pezh voa laret a voa gret :
Setu ar paotr Guillou savet,
A blad var e gov er laker
Eileac'h al leor, var gein an er
A blav a zioc'h ar pillier
« Choum frankil a zo ret breman »
A lavarer neuze dezan
« Divoual da gomz e mod ebet
» Dalc'h ato da zaouarn croachet
» Arabad lenva na c'hoarzin
» Dreist oll dalc'h stiga an daboulin
» Arabad sellet en dro d'id
» Na piou a deu na piou ia kuid. »

Ar ganerien iea brao ganti
Gant o lunedou var o fri
E lennent ep cals mui a boan
Var eur seurt nevez mod leor-cân
Al leor eur veach 'reaz eun trouzik
Alato an oll 'joumaz sioulik.
(Fall eo beza re gizidik),
Pennou scanv netra ken a rê
Sellou corn ag a vasc'houeza
O trei an eil oc'h egile.

Eun dra sur eo, e peb seurt giz
E za an diaoul d'an iliz
Evit distrei ar gristenien
Pa vennont ober o feden.
En dro ma 'za d'an offeren
A zindan farm eur vespeden
Gournial 'ra, frounal, anfin
E choum a za var al letrîn
Me lavar al letrîn nevez.

Da gendelc'her.

(170)

Al Letrin beo

(KENDALC'H)

Den outan ne daolaz evez.
Raktal e cav tro da dremen
Etre ar c'hig ag al lien ;
A setu en gant e virou
O flema e ler da Villou ;
An amprefan leun a valis
A red e leach ma cav frankis.
Eun tachad mad, ar c'heaz paotrik
A c'houzanv, ep lavaret grik.
Arrajet neat gant an drebon
E chom ep finval var e dron :
E c'hoad a verv, d'e benn e sao
Ag ar paour keaz a zalc'h atao.
Anfa setu en eun taol crenn
Ag en ober lamm chouk-a-benn,
En eur leuskel eur skrijaden,
Ac evel eun den possessed
E pik-lamm a dreuz ag a hed
Ag e scrabe, e scrabe ter,
Gant e ziou zorn e zivesker.
Ag en prount er meaz da denna
Ar feuillen daonet : poent e voa !
Croc'hen ar paotr a voa losket
Eleac'h m'en doa' lon tremenet.
Ag epad eis de goude-ze
E renkas choum var e vele.
Anfin dre eur gest er barrez
Voue prenet dezan eur bragez.

Reflexion :

Abarz echui, eur gerik :
Gwelit ama malis Paolik
Dre e ardou diabolik,
Den n'en doa bet offeren
O sonjal er gos vespeden.

318

Ogen Satan, avad, a reaz
Eu devez-se eur gouaid braz.
Diouallit epad ho puez
Da goueza 'tre skilfou ennez ;
Rag ne ket c'hoant a vank dezan
D'ho samma, a d'ho cass gantan.

AR MEDESIN PENNOC

Ian Jostrom, guechall medesin
Ne gawe mui den, an orin.
Sod avoualac'h da lakât e vuez
Etre daouarn eun hevelap lakez.
Anvet e voa gant an oll: Al laz er.
A setu en dilezel ar vicher.
Mez evel al louarn va den
A rank mervel en e grochen ;
Clanv pe varo e gliantet
Dioutan n'heilont ket tec'het,
Rag evit caout atao en e zaouarn
Corfou an dud, petra'ra hon louarn ?
En em ober a ra toull'er beziou !
Choum a ra'tam evel gantan ankou ;
Planta 'ra hepred
Fors tud er vered.

VAR EUR BEZ

Er bez-man eo bet anteret
Eur pa our keaz den a n'en deuz ket
Rentet da Zoue e spered.
— Penaoz-ta ? — N'en doa tam ebet !

DIVAR BENN BEZA EVRUS

Rouane a paotret denved .
An oll a glask an evrusted :
Galz ne dizent ket anezi
Rag n'er c'hlaskont ket en e zy :
Evrusted ar re foll eo plijadur,
Evrusted eo plijadur ar re fur.